



Quatre revendications pour le changement et plus de démocratie

Les organisations politiques, syndicales, associatives ci-dessous, conscientes de la dureté de la crise économique et sociale et de ses conséquences pour la population bretonne, tiennent à réaffirmer solennellement et vigoureusement l'urgence de réformes structurelles en Bretagne.

Réformes sur lesquelles le gouvernement a toute latitude aujourd'hui pour agir vite en apportant, sans attendre, des réponses positives et concrètes.

Soucieuses d'agir collectivement dans l'intérêt de la Bretagne et de sa population, les organisations signataires ont élaboré une plate-forme en quatre points dont la mise en œuvre est de nature à redonner plus de sens à la démocratie, à libérer les énergies et à mieux armer la Bretagne pour appréhender l'avenir.

Elles invitent, à l'exception de l'extrême droite, les élus, les organisations politiques, associatives, économiques, syndicales, culturelles... et l'ensemble des forces vives de Bretagne à s'emparer de cette plate-forme commune, à la promouvoir et à se mobiliser pour exiger du gouvernement des réponses positives dans les semaines et les mois qui viennent.

Des élus bretons, dont plusieurs députés et sénateurs, se sont mobilisés ces dernières semaines, en faveur du processus de réunification de la Bretagne ou de la ratification de la Charte européenne des langues minoritaires. Le conseil régional de Bretagne administrative propose une contribution au débat sur la décentralisation. De toute évidence, ce n'est pas suffisant, il faut amplifier le mouvement.

En conséquence, les organisations signataires appellent les Bretonnes et les Bretons à agir pour obtenir la satisfaction de ces revendications fondamentales préconisées, pour certaines, par l'Europe.

Les organisations signataires demandent instamment au président de la République, François Hollande, au gouvernement et aux élus bretons :

1

DE RATIFIER LA CHARTE EUROPÉENNE DES LANGUES MINORITAIRES,

comme l'avait promis le président de la République, François Hollande, dans son engagement de campagne n° 56 et de faire voter une loi-cadre donnant enfin un statut et une existence légale aux langues régionales, car ces mesures urgentes sont indispensables à la sauvegarde du breton et du gallo. L'État doit laisser toute latitude à la Bretagne pour garantir l'avenir de ses langues en assurant un statut de co-officialité à ces dernières sur l'ensemble du territoire breton ;

2

DE PRENDRE SANS ATTENDRE LES DISPOSITIONS NÉCESSAIRES PERMETTANT LA RÉUNIFICATION DE LA BRETAGNE.

D'engager, dans ce cadre nouveau, la création d'une collectivité unique, fusion des départements et de la Région. Ce qui est possible en Alsace devrait l'être aussi en Bretagne ! ;

3

DE PERMETTRE ET DE SOUTENIR LA CRÉATION EN BRETAGNE D'UNE TÉLÉVISION PUBLIQUE BILINGUE DE PLEIN EXERCICE,

sur l'exemple de Via Stella en Corse, s'appuyant sur le potentiel technique et humain existant, émettant sur les cinq départements bretons, proposant au minimum 30 heures de breton par semaine et prenant en compte le gallo. Ce nouveau pôle-média doit aussi intégrer une radio publique émettant en français, breton et gallo, sur l'ensemble de la Bretagne ;

4

DE DONNER À LA BRETAGNE, DANS LE CADRE DE LA FUTURE LOI DE DÉCENTRALISATION, UN STATUT PARTICULIER DOTANT L'INSTITUTION BRETONNE D'UNE ASSEMBLÉE

disposant – à l'instar des « grandes régions » européennes (Écosse, pays de Galles, Catalogne... qui possèdent un véritable Parlement doté de pouvoirs importants) – de nouvelles compétences, d'un pouvoir législatif et réglementaire ainsi que d'un droit à l'expérimentation dans des domaines différents allant de l'eau, la culture... à la politique linguistique... Ces nouvelles compétences doivent s'accompagner d'un budget et d'une fiscalité adaptés afin de répondre aux défis économiques, sociaux, environnementaux et culturels des années à venir. Si des statuts particuliers sont possibles pour les grandes métropoles de Paris, Lyon et Marseille, pourquoi pas pour la Bretagne ?

Les organisations signataires s'engagent à promouvoir de la façon la plus large possible ces revendications auprès des Bretonnes et des Bretons, de leurs représentants, et appellent au rassemblement des forces vives de Bretagne : économiques, culturelles, sociales, politiques, syndicales, institutionnelles... pour porter ces revendications et faire que l'État respecte enfin nos droits démocratiques fondamentaux.





4 arc'hadur evit degas cheñchamant ha muioc'h a zemokratelezh

An aozadurioù politikel, sindikadel, kevredigezhel a zo meneget amañ izeloc'h a zo en em vodet e Breizh nevez 'zo. Gwelet splann a ra an aozadurioù-se pegen kalet eo an enkadenn armerzhel ha sokial a zo o ren er mare-mañ, ha gant se pegen diaes eo buhez an dud e Breizh. Setu ma fell dezho adlavaret groñs ez eo mallus-bras adreizhañ ar frammoù e Breizh.

Gouest eo ar gouarnamant hiziv an deiz, ma fell dezhañ, d'ober an traoù ar buanañ ar gwellañ ha da reiñ evel-se, hep gortoz pelloc'h, respontoù fetis hag a yafe war an tu mat.

Mennet eo an aozadurioù siner d'ober an traoù a-stroll evit mad Breizh hag ar Vretoned, se zo kaoz o deus diazezet ur gensavenn pevar foent enni hag a c'halla, ma vez lakaet da dalvezout, adstaliañ ur gwir zemokratelezh, reiñ frankiz d'an energiezhioù ha prientiñ Breizh diouzh ar gwellañ evit an amzer-da-zont.

Pediñ a reont an holl, dilennidi, aozadurioù politikel, kevredigezhel, armerzhel, sindikadel, sevenadurel... ha tout an dud oberiant e Breizh, war-bouez re an tu dehoù pellañ, da vont a-du gant ar gensavenn-se, da vrudañ anezhi ha da stourm evit goulenn digant ar gouarnamant respontoù war an tu mat a-benn ar sizhunioù hag ar mizioù da zont.

Er sizhunioù diwezhañ e oa bet dilennidi vreizhat, meur a gannad ha meur a senedour en o zouez, oc'h en em sevel evit lakaat adunvaniñ Breizh pe lakaat peurwiriekaat Karta Europa ar yezhoù bihanniver. Kinnig a ra Kuzul-rannvro Breizh velestradurel embann e savboent er c'hendiviz diwar-benn an digreizennañ. Sklaer eo deomp n'eo ket trawalc'h, ret eo mont pelloc'h ganti.

Kement-se zo kaoz e c'halvomp an holl Vretoned d'ober evit ma vo asantet d'an arc'hadurioù diazez-se a vez erbedet, evit lod anezho, gant Europa.

Goulenn groñs a ra an aozadurioù siner digant prezidant ar Republik, François Hollande, digant ar gouarnamant ha digant dilennidi Breizh :

1 MA VO PEURWIRIEKAET KARTA EUROPA AR YEZHOÙ BIHANNIVER, evel ma oa bet promet gant prezidant ar Republik, François Hollande, en e bromesa niv. 56 pa oa o kabaliñ, hag ivez ma vo lakaet votiñ ul lezenn-stern da reiñ, a-benn ar fin, ur statud d'ar yezhoù rannvro, dezho da vezañ anavezet ez ofisiel, rak paneve se ne vo ket saveteet ar brezhoneg hag ar gallaoueg. Ret eo d'ar Stad lezel frankiz gant Breizh da ziazezañ ur statud kenofisiel evit he yezhoù abalamour da reiñ dezho un amzer-da-zont.

3 MA VO GALLET SIKOUR KROUIDIGEZH UR GWIR SKINWEL PUBLIK DIVYEZHEK, diwar skouer Via Stella e Korsika, gant harp an teknikoù hag an dud a vicher a zo er vro dija. Skignañ a raio e pemp departamant Breizh, kinniget e vo gantañ 30 eurvezh abadennoù brezhonek bep sizhun d'an nebeutañ ha roet e vo e blas d'ar gallaoueg ivez. Er pol-media nevez-se e vo ivez ur skingomz publik hag a skigno abadennoù e galleg, e brezhoneg hag e gallaoueg e Breizh a-bezh.

Gouestlañ a ra an aozadurioù siner brudañ, ar muiañ ar gwellañ, an arc'hadurioù-se e-touez pobl Breizh hag he dileuridi, ha gelver a reont an holl dud oberiant e Breizh, ha pa vefe war an dachenn ekonomikel, sevenadurel, sokial, politikel, sindikadel, pe ensavadurel... da sevel a-du gant an arc'hadurioù-se ha da lakaat ar Stad da zoujañ hor gwirioù demokratel diazez.

2 OBER DIOUZH MA VO GALLET ADUNVANIÑ BREIZH, e-barzh ar stern lezennel nevez-se, ur strollegezh hepken a vo kendeuzet enni an departamantoù hag ar rannvro. Ar pezh a c'haller ober en Elzas a c'hallfe bezañ graet e Breizh ivez !

4 REIÑ, DRE AL LEZENN DIGREIZENNAÑ DA ZONT, UR STATUD DISHEÑVEL DA VREIZH evel ma'z eus gant « rannvroioù bras » Europa (Skos, Kembre, Katalonia... o deus ur gwir parlamant gantañ galloudoù a bouez), da lavaret eo ur vodadenn ganti barregezhioù nevez, ur galloud lezenniñ ha reoliñ hag ar gwir da arnodiñ war meur a dachenn, eus an dour, ar sevenadur... hag ar politerezh yezh... Ret e vo, da-heul ar barregezhioù nevez-se, kaout ur budjed ha telloù da gordañ, abalamour da vezañ gouest da respont d'an dalc'hoù da zont war an tachennoù armerzhel, sokial, sevenadurel hag hini an endro. Ma c'haller kaout ur statud disheñvel evit meurgêrioù bras Pariz, Lyon ha Marsilha, d'ober petra ne vefe ket unan evit Breizh ?

